

CHANSON

POTRET PLOUILLAU

Var ton : *Adieu, Pontreo.*

- 1 M'am bije speret da gompren, evel a meus fantazi,
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi
Eur c'himiad leun a c'hlac'har, gret da gonscrivet
(yaouanq)
- 2 O deus tennet ar billet du ebars er blaves prezant.
Ebars er bla mil e is cant c'hoec'h, ar bemb a vis guéh-
E zeo digueet adare eus a baros Plouillau [golo,
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an derrupla
Glac'haret eo oll ligne, p'o guelont o partiat.
- 3 Da partia gant an actif ne zeus quen nemet pévar;
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan Ar Meledar,
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Avenant
Pévar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud vaillant.
- 4 Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'he gamarad :
Emâ a zo un devez trist hac a ra din calonad !
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad qez desolet !
Va c'halonic ebars eur c'hreis zo dija casi rannet.
- 5 Calz a sonche de, marteze, penos e ven eur poltron,
Em be aon rac eun ten fuzuil pe rac eur voulet canon
P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an hentchou,
Pe gousquet var eur guele can ebars er c'hordegardou.
- 6 Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va zabren,
Bale bemde a guér da guer dre ar fanq hac ar vouillen
Ha goude e fin va beac h rencout marteze campi,
Pe gousquet var an douar ien, pe otramant biouaqui.
- 7 Tor o deus an neb a sonch se ; ma c'haljent lenn em
Evit guelet va holonie ha va inclination [c'halon
Ma na fofte nemet va goad, me en scuilfe tout joaüs
Evit souten hon Impalaér, eun tad quer carantezuz !

- 8 Piou na gombatfe quet hardi gant eun Impalaër christen;
Eur gaus quer just hac e hini a zo facil da sôuten,
Pa zomp memprou da Jesus-Christ, soudarded an Aviel
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel.
- 9 Arça eta, camaradet, quen quitaad euz or c'houtre,
Demp ni da iliz Plouillau da supplia hon doue
D'hor preservidemoüs goal'chans pa vezimp en armeou,
Ha da gousoli-bars er guer hon tadou hag hon mamou.
- 10 Adieu dec'h, Autro sant Millau, patron euz ar barous-ma,
Adieu, querent ha mignonet cessit breman da vouela.
Pedit Doue hac ar Verc'hez da gavet soign ac'hanomp,
Hac hon Ael-mad d'or c'honduo partout elec'h ma ze-
[fomp.]
- 11 Adieu, va mab, va esperans, eme an tad desolet;
Piou a gousolo da dud paour goude ma vi partiet?
Pa vin accablet gan coznî, me vo clevet o laret:
Ma vije ma-vap quez er guer, en dije va soulajet.
- 12 Clevit ar vam o quimiad ive digant he buguel:
Deus ama c'hoas, ma poqin eur vech quenteguet mervel,
Aben ma reformi d'ar guer, me vo ed euz ar bed-ma:
Deus ama etre va divrec'h evit ar voech diveza.
- 13 A guichen ar momet fatal ma c'heus tennet, d'ar billet,
Bemnos vel ma fot di cousquet, me a seblant da velet
O tont eus eur gombat sanglant var enr chariot blesset,
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonet.
- 14 Ar zoudard yaouanc contristet c'hoas quen eguet partia
Eyit essat o c'honsoli a lavar, en eur vouela:
Tavid, va zad ha va mam baour, ha bevit en esperans,
Doue; tad a visericord; a zo bras e brovidans.
- 15 Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gant gras Doue hag ar Verc'hez, e vezo fin do clabar,
Evit merq eus hor vaillantîs, gant lore deus hon tocou
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taélou.
- 16 Adieu da baros Plouillau ha de oll habitantet
Adieu d'hon oll apaoudeguez, ha querent ha mignonet,
Ha ma na mamp quet ar boneur er bed-ma d'en em velet
Gras deomp chars er barados assembles d'en em gavet.

(Propriété.)

Lanhuon, en ti intanvez Ar Goffic, levrer.

Var eun ton trist.

Person Caouen a lavare,
E prôn an ofern, eur sul a oe :
« Otro Doue, emean, Caouenniz,
Eur c'hélou trist zo'n oc'h iliz
Arri a zo eun decret neve,
Deut demeus abeurz ar Roue,
Da laret e vo ret cavet
Ar c'horfou guellan euz ar oerzet.
En han Doue, me o supli,
En Lanhuon n'em geved c'hui. »

Cri vije ar galon, ma na ouelje,
En ker Lanhuon, nep a vije,
O velet Caouen ha Plouber
Bihan ha bras o tond en ker ;
O velet Caouenniz o velan
Quen a felle de fatitlan.
Plouberiz a nevez tennet.
Gant Caouenniz var ar billet ;
Manet ec'h e gand Caouenniz
Digouet e da Garen ar Bris. »

Garen ar Bris a deplore,
Ne gavje den e consolje :
Ne gave den den consoli,
Merd e baeron pa oa arri :
« Ma fillor paour, na velet quet,
Serviji ar roue zo ret.
— Me ne rajen fors vit partian,
Penevert ma mamm a zo clan :
E man var e guele seiz vla-zo
Ha ne deuz nemerdon var he zro. »

Garen ar Bris a hirvoude,
An nor var e vamm pa diore :
« Sevet, ma mamm baour a leze,
Ma rin c'hoas eur vech o guelet.
— Pe te zo skuiz ouz ma guelet ?
Pe te zo squis gand ma c'hlemvet ?
— Ne non ket skuiz ouz o guelet,
Na quen-neubent gant o gleavet :
O tenna dar billet ez on bed,
Zoudard vit Caouen on laquet. »

Pa voant o daou o teplori,
E c'hantre e gamarad e ti,
Hac a lavaraz evel-hen,
'Neur antren, d'ar paour Garen :
« Hastit ma c'honsort depechan,
Ma c'heomp da Guengamp da lojan.
— Me ne rajen fors vit partian,
Penevert ma mam a zo clan :
E man var et guele seiz vla-zo
Ha ne deuz nemerdon var he zro. »

Garen ar Bris a deplore,
An nêr var e vamm pa serre :
« Me lar dec'h ma mamm, kenavo,
Er barados ni n'em velo. »
Da vates ar person a laraz,
E presbyter Caouen pa arriaz :
« Dalet, matez, ma alhoueou,
Soignit ma mamm baour a vechou.
« — Lequet oc'h alhoueou lec'h ma querfet
E lec'h ma o lequefet o c'hefet. »

Neuze e larraz d'ar person,
O sonjel cat consolation :
« Person Caouen m'a am c'heret,
Ma alhoueou diganin-me quemeret ;
Recommandet ma mam'n hoc'hofern bred
Ma iel an dud vad de guelet.
— Lequet, eme person Caouen,
A lavaraz d'ar paour Garen,
Lequet oc'h alhoueou lec'h ma querfet,
E lec'h ma o lequefet o c'hefet. »

« Otro sant Garen, ma faeron,
Gret evidon eun donêzon :
Lequet o cleier da zon canvo
D'am mammic baour pa vo maro,
'Vit ma c'hellin, pa o c'hlevi,
Donet d'ar gêr d'he c'hinterri :
Rac pa e dilezet, ha hi clan,
Gand an dud, pa bartian,
E vo ive pa vo maro,
M'ar na vent quet var he zro. »

Eun de pa oa Garen en arme,
Pemp cant leo demeus e gontre,
E scoas eur c'hlaouen 'n he galon,
O clêvet cleier Caouen o son.
Ar Zant a nevoa roet dean
Pez neva goulet digantan :
Rac ar c'hleier a zone canvo
D'e vamm baour a voa maro.
Ractal e laraz d'he gabiten,
En eur ouela evel-hen :

« Iscuz ma c'habiten, a c'houlan,
Prest é ma c'halon de rannan :
Me gleo cleier Caouen o son canvo,
D'am mammic baour a zo maro.
— Penos a ofes clêvet ane,
Ha te pemp cant leo dioute ?
— O troad, var ma hini lequet
Hac evel-d'hon-me o c'hlevfet.
— Dalet-ta ho conje, Garen,
Hac en em rentet e Caouen. »

Garen ar Bris a vonjoure,
E bourg Caouen pa arruë :
« De bonjour dec'h-hu, Caouenniz,
Pretra a zo a neve n'hoc'h iliz ?
— Garen, na gompnomp netra,
Ni en azur en quement-ma.
E man ar c'hleier o son tri miz so,
Hep ma zo den beo var o zro.
Tri miz so e maint er guiz-ze,
Hep ma neuz den touchet ont-he

Garen ar Bris a lavare,
An nôr var e vamm pa diore :
« Me vel, ma mamm, ez oc'h dilezet
Aboue ma c'hom-me partiet,
Rac var an treuzo a velan
E c'he lezet ar ieot da divoan.
Pa antreaz ebars an ti.
Ar Verc'hes voa ouze e lieni.
A vriet 'n e vamm e croguet
Ha var ar plas ec'h e marvet.

AR MEMEZ TRA

« Ar bed oll, eme lann goz, a gemer eur stum fall,
N'euz chomet war an douar man vel ma oa gwec'h
[all.]

Paour kez lann, c'hui zo chenchet, dre m'oc'h deuet
[da c'hrista ;

Mex ar bed a zo chomet memez tra, memez tra.

Goude al loar, ar steret hag an devalijen,

Gand an heol bep mintin e par ar sklerijen ;

Barz'an oabl an alc'hueder a zao en eur gana,

Vel'enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Gant he chupen erc'h skornet, pa zen ar goan gri

Da c'hourda hon biezid ha ruia hor fri,

Ann eil demuez egile daou bried a dosta,

Vel'enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

P'erru ann nevez amzer da c'head ar parkou

Da lakat bleun er balan, delio bars ar c'hoajo ;

Lagad ar merc'het yaouank ive a zedara,

Vel'enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Ar yugale a zo breman begek, beo ha seder ;

War meur a dra inz gwiek arog goud ho Fater ;

An avajo hanvrued a blij d'he ar muia,

Vel'enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Ann diaoul a gollaz Eva beprend a zo temptuz.

Ar merc'het koant a zo atao bresk ha sentuz ;

Demenz ar frouez disfenet, kalz ziouaz ! a glanva,

Vel'enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Potret a weler bemde ho wapad merc'het ;

Merc'het a weler ive ho kaketal potred ;

Touet kalz, d'erc'hel neubeud, azo ar c'hiz brema ;

Vel'enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Nemed ar brago toul-gwis, al lero marelet,

A jeteren kov-iodeck, ar berulen poultreri.

Pez a chom a zo chomet ebars ar stad ma oa,

Vel'enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

(Propriété.)